

D'ar 15 a viz Meurzh

- Er I^{añ} kantved, **sant Longinus**, ar c'hantener a doullas e gostez d'an Arloz. Hervez an hengoun e tilezas ar vuhez soudard hag en em lakaas e skol an Ebestel. Tremen a reas 28 bloaz e Kaezarea Kappadokea evel penitiour hag e c'hounezas kalz a dud d'ar feiz dre e gomz ha dre e skouer.
- Bepred er I^{añ} kantved, e Breizh-Veur, merzherenti **sant Arwestl** pe **Aristoboulos**, diskibl an Arloz. Hervez an hengounioù gresian ha breizhveurat e vefe Zebedea, breur Barnabaz, eleze tad sant Jakez an Henañ ha sant Yann ha c'hoazh, hervez lod, tadeg an abostol sant Pêr. Bez' e vije bet kentañ eskob Breizh-Veur bet kaset di gant an Ebestel.
- E 1660 e Pariz, **santez Loeiza a Varillac**, mamm a diegezh ha leanez da c'houde. Pa voe intañvezet e ouestlas he buhez d'ar beorion. Ambrouget gant sant Visant a Baol e tiazezas keneilezh Merc'hed ar Garitez.
- E Breizh, **sant Bozian**, manac'h a gaver roud anezhañ e Hañveg e Kernev.

D'ar 16 a viz Meurzh

- E 370, e Edesa, distro da Zoue ene **sant Abraham**, beleg penitiour. Nac'hañ a reas un dimeziñ grataus hag e kuitaas e diegezh pinvidik evit en em ouestlañ da Zoue. A-vec'h beleget e c'hounezas da Zoue annezidi pagan Beth-Kiduna lec'h m'edo o chom. Da heul an drec'hadenn abostolek-mañ en em dennas e gouelec'h Edesa evit ren ur vuhez penitiour.
- War-dro 680, ganedigezh en neñvoù **santez Euzebia**, abadez e Bro-Flandrez. Goude marv he zad sant Adalbad, ez eas gant he mamm santez Rigrud e manati Marchiennes, a-raok bezañ dilennet, hag hi 12 vloaz nemetken, e penn kouent Hamage war-lerc'h he moereb santez Jertruda.
- Er VII^{vet} kantved, en Alamagn, **sant Dentelin**. Hag eñ mab santez Waltrud ha sant Visant Madelgair, breur sant Landri, santez Adeltrud ha santez Matelbert, ez eo marvet d'e 7 vloaz ha kehelet e Kleve (Gl. Clèves) e Bro-Roen.
- War-dro ar bloaz 1000, e Bro-C'hall, **sant Gregor**, eskob ha penitiour. Ganet en Armenia, ez eas da vanac'h e-kichen Nikopolis Pontos hag e voe galvet da vezañ eskob ar gêr. Goude bezañ en em ouestlet da c'hounit ar vanikeed ha disivouderion all d'ar gwir feiz, e kemeras penn an hent gant daou vanac'h hag e teuas d'en em staliañ e Bro-C'hall nepell diouzh Pedeverius (Pithiviers) e-kichen ur chapel ouestlet da sant Varzhin Gwerzhoù. Eno e vevas er bedenn hag er binijenn.
- E Breizh, e 908, **sant Elektran II**, eskob Roazhon.
- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **sant Aban**, abad Cill Abbán.
- En Iwerzhon c'hoazh, e 560, **sant Fionnan (Finien, Gwennan)**, lesanvet *al Lovr*, diskibl sant Koulmkell, abad Swords e-kichen Dulenn.

D'ar 17 a viz Meurzh

- En Ilizoù ar Reter sant Jozef Arimatea hag a vez lidet er C'hornôg d'an 31 a viz Eost war un dro gant sant Nigoudem.

- E 669, **santez Jertruda Nivel** (Gl Nivelles), abadez.

Merc'h ar wenvidigez Itta Iduberj ha Pepin Landen, maer palez Dagoberzh, roue Aostrazia, e resevas gouel ar gwec'hezed eus daouarn sant Amand er manati bet diazezet gant he mamm ha lec'h ma oa manac'hez hi he-unan. Abadez kerkent hag he ugent vloaz, mignonez sant Follan ha sant Ultan, e renas gant furnezh ar gumuniezh manac'hezed ha menec'h a heulie reolenn sant Koulman Veur.

- E 461, en Iwerzhon, dostro da Zoue ene **sant Padrig**, eskob Ard Macha, Patrom Iwerzhon. Hervez an hengoun e vefe bet ganet Padrig e Breizh-Veur, eus Calpurnius ha santez Koñvez, c'hoar pe nizez sant Varzhin. Bet skrapet gant preizhaterion d'e 16 vloaz en hanternoz Breizh-Veur e voe dalc'het Padrig en Iwerzhon evel sklav hogen dont a reas a-benn da dec'hout kuit. Galvet avat da avielañ Iwerzhon ez eas d'en em stummañ en enezenn Lerina hag e voe ivez diskibl sant Garmon (Jermen) Autissioduron (Auxerre). Gant un ugent bennak a veleion e tistroas d'an enezenn a voe gounezet buan ar bobl d'ar feiz kristen en un doare burzhudus kement ha ma voe goloet Iwerzhon gant manatioù a voe kreizennoù avielañ Europa a-bezh..

- En deiz-mañ e c'heller ober **kounidigezh holl sent Iwerzhon** a vez lidet eno d'ar 6 a viz Du. E kantvedoù kentañ ar gristeniezh e oa anavezet Iwerzhon evel enezenn ar sent hag an dud ouizie. Labourat a reas an Iwerzhoniz da skignañ ar feiz en Europa ha pelloc'h c'hoazh hervez *Immran sant Brendan*.

- En IX^{vet} kantved, **sant Merliran**, merzher, Skosad, lazhet e Reims.

- E Breizh, e 1637, **ar pac'hiad Pêr Jeuvaud (pe Jouault)**, dominigad e Roazhon. Adreizher meur a gouent e tiazegas Kenvreuriezh Sant Visant Ferrer a voe kavet mat gant ar bibion. Bezet e voe gant lidoù bras e kouent Roazhon.

- Bepred e Breizh, e 1769 e Porzh-Karozh e Bro-Anast en eskobiezh Sant-Maloù, distro da Zoue ene **ar bac'hiadez Madalen Morice**, d'he 33 bloaz, kevrinourez kleizennet.

- D'an hevelep deiz : **Dedi iliz-veur Gwened** e 1499.

D'an 18 a viz Meurzh

- War-dro 250, e Jeruzalem, merzherenti **sant Aleksandr**, eskob.

Eskob e oa e Kappadokea pa zeuas da Jeruzalem lec'h ma voe fiziet ennañ karg pastorel ar Gêr Santel. Eno e tiazegas ul levraoueg binvidik hag e tigoras ur skol a zoueoniezh. Da-geñver heskinadeg Decius, pa oa kozh endeo, e voe taolet en toullbac'h lec'h ma varvas.

- D'an hevelep deiz e 303, lazhadeg **an Dek mil merzher eus Nikomedia** bet treuzet gant ar c'hleze da vare Diocletianus evit bezañ goubonnet anv Jezuz.

- E 386, **sant Kirill Jeruzalem**, eskob ha doazhour eus an Iliz.

Heskinet e voe gant an Ariaded ha meur a wezh e rankas kuitaat e sez. Dre e brezennoù hag e gatekizerezh e kelennas ar feiz wirion hag e labouras da unanded an Iliz e Goursenez Hollilizek Kêrgustentin.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **santez Derwell**, mamm sant Maloù.

Hervez an hengoun, e vefe merc'h Emyr Llydaw ha c'hoar santez Ammon Du, ha neuze moereb sant Samzun.

- War-dro 588, **sant Fridian** (Iw. Frighidian, It. Frediano), manac'h iwerzhonat a voe anvet eskob Lucca e Bro-dToscana p'edo o tistreiñ eus ur birc'hirinadenn da Roma.

Strollañ a reas ar gloer un ur manati evit mad ar bobl. Diheñchañ a reas red ar stêr Arno o c'hounit evel-se un dachenn strujus. Gounit a reas d'ar feiz katolik al Lombarded a oa nevez deuet er vro.

- En hanternoz enezenn Vreizh (Bro-Skos), er VII^{vet} kantved, **ar sent Komman ha Kummin**, breudeur ha menec'h o-daou en enez Iona.

D'an 19 a viz Meurzh

- **Gouel sant Jozef, pried ar Werc'hez Vari**¹, paeron an Iliz Hollvedel. Ezel eus tiegezh David, e voe rakdibabet gant Doue da veilhal evel un tad war Vab Doue, ar C'Hrist Jezuz a vennas bezañ anvet Mab Jozef hag a vo sujet dezhañ evel ur mab d'e dad.

- Er IV^{re} kantved, e Roma, merzherenti **sant Panker**.

Ganet e Roma en un tiegezh kristen edo o terc'hel ur garg a-bouez e lez an impalaer Diocletianus pa rankas nac'hañ e feiz pe da nebeutañ he c'huzat dindan gourdrouz an impalaer. Pedennoù e vamm hag e c'hoarezed e lakaas da gaout keuz hag e tisklêrias gant kalon e feiz adkavet. En abeg da se e voe dibennet.

- E 666, e Wintershoven e Flandrez, **sant Landoald**, beleg kiminiat.

Genidik eus Lombardia, e oa beleg e Roma pa voe kaset, a-gevret gant an diagon sant Amañs, war gentod ar pab sant Varzhin, da avielañ Bro-Flandrez gant sant Amand. Hemañ en doa dilezet e garg a eskob Maastricht etre daouarn sant Remakl hag a oa deuet da c'houlenn ouzh ar pab kregiñ en-dro gant e c'halvidigezh kentañ, eleze bezañ eskob abostolek emouestlet da avielañ ar pobloù. Ar pab a gasas ivez ganto santez Vinsiana, santez Adeltrud, sant Juluan ha seizh all, gwazed koulz ha maouezed. Landoald a skoazellas sant Remakl hag e warlerc'hier sant Teodarz.

- E Breizh, VII^{vet} kantved, **sant Korwezh** (Gl. Corbase), abad Langroaz Kemperle.

- Er VI^{vet} kantved, merzherenti **sant Kologer** (Gl. Colocer) a vez meneget e deiziadur kozh eskobiezh Sant-Brieg.

- En Iwerzhon, war-dro 460, **sant Aoksilian**, eskob. Mab Restitud ha santez Kulmana, c'hoar sant Padrig, e voe lakaet gantañ da eskob kentañ Killosey.

- War-dro 464, **sant Mazved** (Lt. Mansuetus ; Gl. Mansuet), eskob. Genidik moarvat eus Iwerzhon, e voe eskob e Breizh-Veur hag en Arvorig tra ma voe anvet "*eskob ar Vretoned*" e Senez Teurgn e 461.

- Er V^{vet} kantved, **sant Liberal**, warlerc'hier sant Mazved.

¹ Gouel enskrivet e deiziataer an Iliz e 1621 gant ar pab Gregor XV.

- En Iwerzhon, e 672, **sant Lachtan** (Lactan, Lt Lactinus), abad.

Ganet e-kichen Corcaigh e voe diskibl sant Komgall ha sant Luan e Bangor. Kaset e voe da ziazezañ abati Achadh-Úr, hiziv Freshford e kontelezh Kilkenny.

- War-dro 800, **sant Almond**, feizvonnour.

Hag eñ priñs eus tiegezh roue Norzumbria e voe harluet e bro Pikted Bro-Skos lec'h ma voe lazhet e Derby en doare ma voe enoret evel merzher.

- E 1258, **sant Klemenez**, eskob.

Degemeret e Urzh ar Vreudeur Brezegennerion gant sant Dominik e-unan e voe karget da astenn an Urzh e Bro-Skos lec'h ma voe anvet eskob Dùn Bhlàthain.

- E Breizh, **ar gwenvedig Marcel Callo**, merzher.

Ganet e Roazhon e 1921, ha marvet e 1945 e Montheissen, ezel eus ar Yaouankizoù Oberourion Kristen.

D'an 20 a viz Meurzh

- Er I^{añ} kantved, **santez Fotina**, diskiblez Jezuz.

Hag hi Samaritanez e kejas gant an Arloz e puñs Jakob : deuet da gerc'hat dour, e kavas an "*eienenn o strinkañ evit ar vuhez peurbadel*." (Yn, 4.14) Hervez un hengoun e vije marvet karc'hariet e Kartaga a-gevret gant unan eus he mibion. Hag hervez un hengoun all, e vefe chomet e Galilea lec'h ma vije bet merzheriet a-gevret gant he mab Viktor, ofiser en arme an impalaer. Hemañ, karget da heskinañ ne ehane ket er c'hontroll da embann ar feiz.

- Bepred I^{añ} kantved, merzherenti **sant Arc'hippoz**.

Mab sant Filemon ha diskibl sant Paol a rae anezhañ "*hor c'hevrezelour*" en e lizher kaset d'e dad, e voe karget eus Iliz Kolos. Dre ma nac'has kinnig un aberzh da Artemiz, e voe diwisket ha kinniget da zoueez ar gened. Goude bezañ skourjezet e voe taolet en ur foz, douaret betek an dargreiz ha droukroet da vugale e deuztoulas gant nadozioù hag e veinatas.

- E 797 e Palestina, **Merzherion Sabas**, menec'h eus laor Sant-Sabas bet lazhañ gant ar Sarazined.

- E 1393 e Praga, sant **Yann Nepomuk**, beleg merzher.

Ganet e Nepomuk e Bohemia, e reas studioù war ar gwir a-raok mont da veleg e touez chalonied iliz-veur Praga. Deuet da vezañ vikel-vras ha chapalan ar rouanez en devoe kalz da c'houzañv digant ar roue Venseslas IV, impalaer Germania. Harzet ha bac'het, e voe boureviet ha jahinet hag en dibenn taolet eus ur pont er Moldav.

- E Breizh, er V^{vet} kantved, **sant Aozilian**, beleg urzhiet e Dol gant sant Senour.

- Er V^{vet} kantved, **sant Loarn**, eskob.

Diskibl da sant Padrig e voe kaset gantañ da embann an Aviel d'ar Vretoned.

- E 687, **sant Kutberzh** (Gl. Kutberzh), abad eskob Lindisfarn, feizvonnour.

Un Iwerzhonad e oa, ganet e Ceanannas. Da gentañ manac'h e manati a c'hiz iwerzhonat Melroz e voe anvet abad Lindisfarn a c'hiz beneadat. Buan e tilezas e garg evit distreiñ da Velroz ha mont da benitiour war enez Farn. Kelenner sant Ivi e voe. Moarvat eo eñ a vez meneget e deiziadur kozh eskobiezh Sant-Brieg.

- **Sant Herbert**, penitiour.

Edo o vevañ war un enezenn e-kreiz ul lenn hag e teue bep bloaz da gaout e vignon sant Cutbert en doa dilezet e garg a eskob evit ren ar vuhez penitiour. Bez' o devoe ar c'hras da vervel war bouez un nebeut devezhioù an eil diouzh egile ha d'an hevelep eur.

- War-dro 818, **sant Klemez Iwerzhon**, manac'h .

Deuet eus Iwerzhon gant e geneil Albinus pe Ailbe e kelennas e Pariz da vare Karl Veur. Marvet e Autesiodurum, hiziv Auxerre, e voe sebeliet en iliz Sant-Amator.

D'an 21 a viz Meurzh

- Er bloaz a c'hras 116, **merzherenti santez Kallinika hag he c'heneilezed**, en o zouez **santez Drosella**, merc'h an impalaer Trajan, ha **Santez Matidia**, c'hoar dezhañ.

Diskuliet evel kristenized e voent kondaonet da gentañ da vezañ lakaet en diskouez noazh evit bezañ izelaet e keñver o renk ha da c'houde lakaet a-gevret en ur gibelladenn ma voe redet staen ha plom teuz enni, a voe arveret evit sevel pemp delwenn vestalezed en enkerzh ar c'hibellec'h ma voent merzheriet ennañ evel arouez ar blanedenn miret d'an uhelidi a drofe d'ar feiz kristen.

- E 346, **Merzherion Santel Aleksandria**.

Da vare heskinadeg an impalaer Constantius e voent lazhadeget en ilizoù da zeiz ar Gwener Santel gant bagadoù ariaded ha paganed en ur argadenn spontus a zo bet danevellet en e "Eil Apologiezh" gant sant Atanaz a zeuas a-benn da zont salv anezhi.

- E 1487 e Ranft, nepell diouzh Sachsen e Bro-Suis, **sant Nikolaz Flüe**.

Tad a diegezh, dek bugel dezhañ, ez eas pa oa ouzhpenn hanter-kant vloaz, gant asant e wreg, da benitiour er menezioù. Paeron Bro-Suis eo.

- E Naoned, e 527, **sant Epifan**, eskob Naoned (502), ganet en Anjou.

- E 530, en Iwerzhon, **sant Enna**, "*Tad ar vanac'helezh*".

Mab Ainmire, e voe kanttroet gant e c'hoar santez Fanchea hag e voe diskibl sant Ninian e Ti-gwenn e Bro-Skos. Diazezañ a reas manati Inis Mór en enezeg Aran a voe lesanvet *enezenn ar sent*. E-touez e ziskibled e konter sant Brendan ha sant Kieran.

- Tremenvan **sant Benead** e Monte-Casino e 547 a vez lidet d'an 11 a viz Gouere, deiz treuzlec'h e relegoù, ha **tremenvan sant Roperzh Molesme**, a vez lidet d'ar 26 a viz Genver gant diazezourion Citeaux.

- E 1685, e Gwened, distro da Zoue ene **ar pac'hiad Loeiz-Eudo a Gerlivio**, beleg.

Diazezañ a reas ti retred ar wazed e Gwened, unan eus tudennoù meur adsav ar feiz er XVII^{vet} kantved e Breizh. Ganet en Henbont e voe person Pluergad ha Sant-Padern Gwened a-raok bezañ anvet Vikel-Vras eskobiezh Gwened.